

Chanson ar Gwin ardent

61

VAR DON : *Ar seiz skiant naturel*

1
Me o suppli Bretouned
Da zilaou eur chanson
A zo nevez composed
Var sujet ar boeson.
Kement den hen deuz skiant
A breno ar gan ma
Hag ar rañ d'ar gwin ardent
Ar brezel ar gwassa.

2
Ar gwin ardent da genta
A vije implijet
Da louzaoui loened klanv
Ar zaout hag ar c'hezek
Mes brema e ve lonket
Gant kals evel souben
Gant paotred ha gant plac'hed
Evel lonka keuzien.

3
Klevet oc'h euz koulz a me
Komz euz an droug heurio
En em gaz kazi bemde
Goude re gorfado
Ar boeson ez eo ar mamen
An holl fallagriez
Gwassoc'h eo vit ar vosen
Hag evit a gernes.

4
Ar gwin ardent eo an dra
A gas da berejo
Muioc'h vit ar c'holera.
Koulz ha da'r prisonio
Brasa kriminel a zo
E eo zur an alcool
Kiriek eo d'ar priejo
Alies d'en em goll.

5
Mil gwalheur d'ar paour kez den
En em ro dan evach
Rag ne vo estimet ken
Gant an dud a gourach
Gwaleurus eo he unan
He vreg, he vugale
Ne gaz del na dour, na tan
Nemert glac'har bemde

6
Pa oa Jakez paotr iaonank
E rea promesao
Da Vonik e zouzik koant
Menach kaer ha frico
Monik oa en he galon
Evel eur berlezen
Ken a veraz ar poeson
An alcool er weren.

7
Kenavo ta sonjou kaer
Fin zo d'ar plijadur
Jakez ne zeu ken d'ar ger
Rentet eo ampufur
Ha mar klem ar vreg brema
Euz korfado Jakez
E skofo e'hoas ar prei ma
Taoliou bas ha houtes.

8
Louzoc'h eo euz pried ma
Vit eur bouc'h meson
Skei e vreg, chasa he bleo
Pebeus loen direzon
D'ar vreg ze e ve guelloc'h
Kousket er galeo
Pe kousket en touez ar moc'h
Mui a beoc'h he devo.

13
Eur gwir Breton a zo goaz
Kamez n'eo didalvez
Galvet eo bet a viskoas
Soudard vaillant ive
N'euz ben mert ar gwin ardent
An alcool milliguet
Hag a zouil ebars er fang
Enor ar Vretouned.

9
Taoliou treid a tolliou baz
A dap greg ar mevier
Kals a vugale siouaz
Maget gant a vizer
Ar vam baour a zo kasti
Gant he bugaligou
N'ho deuz gwennek en ho zi
Nemert eun tad mezo.

10
Areted hon tadou kez
Mar zo goad n'ho galon
Sonjit na tristan buez
A rit soufr d'hoc'h itron
A do bugaligou
Roet d'eoc'h gant Doue
Sonjit ezoc'h hoc'h unan
Oblijet d'ar re ze.

11
Heman zo eun abreg
Euz buez eur rouleur
Koll e gorf hag e ine
Hag atao en mizer
He vreg a zo merserez
Hag he c'houadurien
Setu aze va zud kez
Famil ar roulerien.

12
Breman en euz kelou mad
Evit an dud paour ze
A beurs Doue hon guir dad
Louzo vo evithei
En bars en komzou Jesus
Dre ar Speret Santel
Eo iachet ar gwaleurus
Oc'h c'heuil an Avel.

F.-M. QUÉRÉ.

Kousk Breiz - Izel

An heol a zo kuzet, setu echu an de ;
Me glev a c'hloc'h o tintal an Ave.

DISKAN

Kousk, kousk, Breiz-Izel, bro dispar
Setu an noz o tont var an douar
Kousk, Breiz-Izel bro ker mad,
Trouz ar mor vraz a zav d'az luskellat

C'houez vad an ed e bleun hag al lan alaouret,
War ar mêziou gant ar gliz noz a red.

Ar bastored a gân, o testum o loenet ;
Gwerziou Breiz-Izel d'in ket c'hoas kollet.

En traoniennou didrous, me glev kân an eostig ;
Telenner-noz, sonit flour ha dousik.

'Us da Vreiz o skedi, an nev steredennet
A lar'zeus eun Doue ouz hor c'haret.

An neb a c'houez bemdez a c'hounic e repos
D'an dud vad Doue en deus great an noz.

Arvor, o douar sakr, a greiz kalon m'ho kar,
Bro all ken kaer n'eus ket var an Douar !

J. MARÉCHAL.

GALVEDIGEZ JESUS D'AR VRETONED

TON : *Peuple infidèle*

1
Pobl a Vreiz Izel
Perag am dilezet ?
Deuet hom d'ho kervel,
Perag n'am zelaouet ?
Siouas ? evit eun idol.
Ar Breton eu em immol
Hag evit Jesus
N'ho peus nemert refus ! } *bis*

2
Me meus ho karet
Dre eur garante vras,
Me meus ho prenet
N'eur vervel var ar groaz.
Siouas ! eus an idolou,
E rit hu ho toueou,
Hag evit Jesus
N'ho pe nemert refus ! } *bis*

3
Va zreid, va daouarn
Evidoc'h zo treuzet
Gant tachou hotarn
Var ar c'hoat on staget !
A c'houi o peuz ankouezet
A pez evidoc'h meus graet
Hag evit Jesus
N'ho pe nemert refus ! } *bis*

4
Ma fen gont ar spern
A zo bet kurunet,
Betek ma eskern
E zint bet antreet.
Allas ! me ma esperet
E pije c'houi ma c'haret,
Mes evit Jesus
N'ho peus nemert refus ! } *bis*

5
Va c'hostez toulet
Hep truez gant eur lans,
Ma goad deuz ruillet
Evit ho telivrans
Bepred e meus ho karet
Ha c'houi peuz ma dilezet ;
Hag evit Jesus
N'ho peus nemert refus ! } *bis*

6
Sec'h e meus bet
C'houejet meus dour ha goad
Gant an dud disprijet
Dilezed gant ma zad !
Ha breman, abandonnet
Memeuz gant ar Vretoned.
Ar Zalver Jesus
Ne hav nemert refus ! } *bis*

7
Marvet ez oun bet
Evit ho tasprena
Ha ressussitet
Evit ho justina.
Breman eta, Bretoned
Me ho ped, ma zelaouet :
Hag evit Jesus
Bezit karantezus ! } *bis*

8
Selaouit va mouez.
Goulen ran ho kalon.
N'it ket d'ankonez
Hon bepret ho mignon.
Meditet ma Ayiel,
Da Zoue bezit fidel.
Neuze gant Jesus,
C'houi a vezo evrus ! } *bis*

BRO - GOZ MA ZADOU

Ni Brezis a galon karomp hon gwir Vro !
Bruded eo an Aryor dre ar bed tro dro
Dispont kreiz ar brezel hon zadou ken mad
A skuillas eviti o gwad !

Breiz, douar ar Zent koz, douar ar Varzed.
N'euz bro all a garant kemend ' barz ar bed.
Peb menez, peb traonien d'an c'halon zo kaer
Ennâ kousk mear Vreizad t'er !

DISKAN

O Breiz ma bro ! me gar ma Bro,
Tra ma vô mor'vel murn'n he zro
Ra vezo digabestr ma Bro !

Ar Vretoned a zo tud kalet a krenv :
N'euz pobl ken kaloneg a zindan an nenv.
Gwerz trist sîn didius a ziwan eno
O ! Pegen kaër ec'h out ma bro !

Mar d'eo bet trec'het Breiz e brezelliou braz
He iez a zo bebred ken beo a biskoas
He c'halon birvidik a lamm c'hoas n'he c'hreiz
Dihunet out brema, ma Breiz !

TALDIR.